

Reoliadur diabarzh

Arzaoueg-palier Pierre Tal-Coat Henbont

1. Digoradur

An arzaoueg-palier zo ur servij publik get Ti-kêr Henbont.

An arzaoueg-palier zo digor da razh an dud.

« Karta al laikelezh er servijoù publik » zo laket da dalviñ en arzaoueg-palier.

An arzaoueg-palier a zegas he lod evit an diverrañsoù, ar sevenadur,
hag evit roiñ titouroù d'an holl.

An arzaoueg-palier zo ul lec'h kejiñ ha kendiviziñ.

An arzaoueg-palier a ginnig a bep sort servijoù :

- amprestiñ oberennoù arz (stampoù, luc'hskeudennoù, oberennoù trimentek ...),
- diskouezadegoù hag abadennoù.

An dud a labour enni a gas kefridioù an arzaoueg-palier da benn.

Roiñ a raont alioù, kuzulioù ha harpiñ a raont an implijerion.

2. Monet d'an arzaoueg-palier

- **Frank ha digoust eo monet d'an arzaoueg-palier evit :**
 - gwelet an diskouezadegoù,
 - kemer perzh en abadennoù,
 - sellet a-barzh an dastumad oberennoù.
- Merket eo an eurioù digoriñ er-maez
hag enlinenn, el lec'hienn internet www.culture-hennebont.bzh
- **En arzaoueg-palier e vez diwallet ar vugale get o zud bepred
pe get an oadour a zo asamb l gete.**
Get un oadour e rank bout ambrouget ar vugale edan 8 vlez.

- Aotreet eo monet a-barzh get bountelloù.
Ar modoù treuzdouden arall (beloioù, troterezioù, botoù-ruilh, plankennoù-ruilh...) zo da barkiñ er-maez ag an arzaoueg-palier.
- Ar seier hag an dougoù-babig kein zo da lezel en antre ar palier.
- Al loened, namet ar re a ambroug tud nammet, a rank gortoz er-maez ag an arzaoueg-palier.
- Al lec'hioù a-vicher zo evit tud an arzaoueg hepken.

3. Beviñ a-gevret

- **An arzaoueg-palier zo ul lec'h boutin.**

Gelliñ a ra an dud dont di da sipiñ o spered pe da ziskuizhiñ.

- Er-maez ag an arzaoueg-palier e ranker pellgomz.
- Difennet eo butuniñ pe burezhat en arzaoueg-palier.
- An implijerion a rank diwall o aferioù personel.

- **Difennet eo bout diseven get tud an arzaoueg hag an implijerion.**
Ar rustaj verbel ha fizikel zo difennet.
- Gwir o dez an implijerion da eztaoliñ o c'hredennoù.
get ma vo graet hep trubuilhiñ an urzh foran.
- An difraeerezh, ar werzh, an dasparzh brudfollennoù hag ar bruderezh
zo difennet.

- **Doujañs zo deletet en arzaoueg-palier evit mad an holl.**

Taolit evezh doc'h an oberennoù arz hag al lec'hioù mar plij.

Mar bez gwastet un oberenn arz get un implijour e vo facturennet priz an oberenn-se dezhoñ.

- Ne c'hell an implijerion evet ha debriñ namet pa vez abadennoù ha get ma vo taolet evezh doc'h an oberennoù arz.

- Rekis eo doujiñ d'ar c'hemennoù surentez.

- Rekis eo endevout aotre ar c'hoskor evit :

- an atersadennoù,
- tenniñ fotoioù ha filmiñ,
- skigniñ sonenrolladennoù,
- stagiñ skritelloù en antre ar palier.

4. Amprestiñ

- Rekis eo bout ezel evit gelliñ amprestiñ oberennoù arz (stampoù, luc'hskeudennoù, oberennoù trimentek...).
- Titouroù àr an emzeladur digoust hag ar prizioù emezeliñ a c'heller kavout en degemer hag enlinenn, el lec'hienn internet www.culture-hennebont.bzh
- An titouroù personel evit emezeliñ a vez dastumet hervez ar Reoliadur hollek àr gwarez ar roadennoù (RHGR).
- Evit kement priz digresket e ranker diskouez ur brouenn.
- N'hell ket priz an emzeladur bout daskoret.

- **An izili a rank doujiñ d'ar badelezh amprestiñ
ha da garta an amprestour.**
- **Mar bez gwastet un oberenn arz get un ezel e vo facturenn an oberenn-se dezhoñ.**
- **Ma ne vez ket daskoret un oberenn arz get un ezel e vo facturenn an oberenn-se dezhoñ
hag un dell-gastiz en do.**

5. Kemer perzh en abadennoù hag er gweladennoù

- **An abadennoù hag ar gweladennoù zo digor d'an holl.**

Lakat e anv a c'hell bout rekis.

Un oad termen a c'hell bout laket.

Ur paeamant a c'heller goulenn evit kemer perzh.

- Ar pellgomzerioù a rank bout laket e morgousk.
- Doujiñ a ra ar berzhidi komzoù ha soñjoù an holl.

6. Lakat ar reoliadur diabarzh da dalviñ

Razh implijerion an arzaoueg-palier a rank doujiñ d'ar reoliadur diabarzh.

Tud an arzaoueg a daol evezh ma vo doujet d'ar reoliadur diabarzh.

**Mar bez torret ar reoliadur diabarzh get un implijour,
e c'hello bout skarzhet a servijoù an arzaoueg-palier,
evit ur prantad pe da viken.**

N'hello ket priz an emezeladur bout daskoret dezhoñ.

Ar reoliadur diabarzh a c'heller kavout :

- enlinenn, el lec'hienn internet www.culture-hennebont.bzh
- e stumm paper en degemer.

Reoliadur diabarzh an arzaoueg-palier zo bet aprouet

get kuzul-kêr Henbont

d'ar Yaou 26 a viz Gouel-Mikael 2023.



Savet eo an teul-mañ e brezhoneg aes.